

Nag èl ma pasen pont er velin

Kas a barh – Trouzerion (Douar Alre – Fest-noz)

Nag èl ma pasen ar pont er velin lura,
Nag èl ma pasen ar pont er velin,

Kouèhet men gourhed,
men gourhed, men gourhed,
Kouèhet men gourhed argent genein.

Un dousig joli ér cherruas d'ein lura, un dousig ...
Hag e c'houlenne, houlenne, houlenne,
hag e houlenne ur bokig genein

Ur bokig genein hui n'ho po ket
Ker, ma oér me zad, é vein foétet

Ker ma oér me zad é vein foétet
Ha ma oér me mamm, é vein kannet.

Più vehé ar en dro hag e ouiehé,
Mès en éned é blein er gué.

'N énedigeù-sé zou skoleit-mat,
Ind e yei d'er gér de flatirat.

Ind e yei d'er gér de flatirat
Ha lako kannein merhig he zad